

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (2)

Anvioù hon lec'hioù zo en kroashent hon merkerioù, hon istor, istor hon yezh, kredennoù hon hendadoù. Seul wiroc'h pan seller ouzh ar menezanvioù pe ar stêranvioù. Gwir evit kement tachenn yezh zo tout. Gant ar rummadoù anvioù-se e vever un avantur un tammig par d'an hini zo bevet gant ar skiantourien ac'h a da dapout karotezennoù en skorn an daou ahel-douar, kement ha studiañ an istor war an amzer hir, hir. War hoaladoù an hoaladoù...

Evel just, en mesk ar menezanvioù pe ar stêranvioù zo lod nevez, nevez. An dud a vev, o bro a vev, o douar a vev hag o yezh zo evel melezeur ar vuhez-se. Anvioù zo zo ivez azoniad obererezh mab-den, aozadur e labour, e zoareoù-bevañ, e zoareoù politikel.

Diouzh un tu all hon anvioù n'int ket anvioù difoupet diwar netra. Lakomp Treger : Treger zo en un hollad anvet Breizh, ha Breizh zo en un hollad anvet ar Bed predenek. Hon anvioù-lec'hioù zo melezeur ar berc'henniez-se.

Un dra diwezhañ : hon anvioù-lec'hioù zo kindirvi kompez d'hon anvioù-tud. Hon anvioù-lec'h, hon anvioù-lec'hioù zo banniel hon istor, hon sevenadur, hon c'hredennoù... ha hini hon dazont... hini hon pemdez...

Are. Un tolzad menezier eo *Menez Are*, ha n'eo ket un arridennad menezier, dispartiet etre Leon ha Kernev, lec'h m'en em gav beg Treger ivez. Alese anv ur feunteun nepell diouzh abati ar Releg, en Plouneour-Menez : *Feunteun an tri eskob*. Gwezhall e oa ur bloue anvet **Plouvenez*, da lâret eo "ploue ar menez". Bezañ zo c'hoazh eus an anv, met evel eil-anv-lec'h war barrouz Brenniliz, *Ploenez*. Hag ar bloue-se a vriatae Brenniliz, Brasparzh, Lokeored ha moarvat Berrien hag ar Fouilhez ivez. Un doare **Plou-Are* eta. Un doare kevatalded etre *menez* hag *Are*...

Ar stummoù kozh n'int ket puilh na stank avat. Lod zo dindan anvioù tud en barzhonegoù kozh : ar pezh n'eo ket souezhus, pan ouvezer mat pouez al lec'hioù arouezel en buhez an dud. Un doare kenidentelezh. Ar Roman d'Aiquin a gomz eus un dudenn *aray de mene*, ha buhez latin Herve a ro *montem Arai(i)m*. Er seitekvet kantved e oa bet dastumet ar stumm komzet *Menare*, dres evel ma vez klevet kalzik en dez a herie.

Ar wrizienn *ar-* "lec'h uhel" zo bev en un toullad anvioù en Kembre evel *Aran*, *Arenig*, met ivez en Iwerzhon pe en Skos gant anvioù evel *Árainn* (anv gouezeleg an inizi *Aran*). Ar wrizienn *ar-* a gaver ivez dindan gwisk *er-* evel en Kembre, *Eryri*, ar Snowdon en saozneg, ha troet aes "Highlands". Dindan *or-* en henvrezhoneg, aet da *eur-* en krennvrezhoneg (evel en buhez Nonn eus tro 1480, gwerzenn 955 : *Duet dre aeur voar an euryen* "Deuit bremañ war c'hlann (ar feunteun)"), e kaver stummoù all c'hoazh. An holl zo da verkañ ul lec'h uhel, pe uheloc'h evit al lec'h en-kichen... Gant se zo geriennoù kar evel *erien* pe *erion* evit un dilhad ! Ha marteze ar ger *erin*, anavezet mat en Gwened, hag en oberennoù Youenn Drezen.

Ha bezañ zo ur geriennoù all, *er* hag *erer*, geriennoù anavezet mat evit roue an evned preizh : brud gantañ bezañ an evn o nijal an uhelañ. Gant se eo sklaer ster an anv : "evn an uhelennoù" eo an *er* pe an *erer*. *Eryr* en kembraeg, *irar* hag *ilar* en heniwerzhoneg, *er* en kerneveureg. Hep ankouaat anv ar barez, *eres* roet gant an Donoed en tro 1501.

Hon *Are* a deu eus **ōregi* pe eus **āregi*. An dibenn *-e* zo aet da *-i* en kembraeg, evel en *Eryri*. Un dibenn hon devo tro da adkavout meur a wezh, evit anvioù disheñvel all.

Hogene. Ogene a-wezhioù. Hemañ eo ar menez a-geñver da Venez-Bre, en Louergad. A-boanik uheloc'h evitañ. Ar wrizienn *hog-* pe *og-* zo anavezet mat ha bev eo en un nebeud geriennoù evel an henvrezhoneg *ocos*, ar brezhoneg modern *hogos*, ar c'hembraeg *agos*, ar c'herneveureg *ogas*. An holl o talvezout kement ha "tost, nes". Ha ned eo ket dibosubl e vefe ivez un darempred bennak gant an heniwerzhoneg *acus*, *ocus*, met mann asur.

Met ar meneg tostañ, mar gallan lâret, zo roet en ur skrid krennvrezhoneg, un tammig ispisial... a lârfen ! Ur skrid lakaet war gont ur serten Ivoned Omnes hag a ouveze eilskrivañ, bliv, skridoù latin en tu Pariz. Pensum ur c'hloareg harluet. Ne oa skol-veur ebet en Breizh d'ar c'houlz-se, kompren a refet. E oamp en tro 1350. Ha sede ar pezh a skrivas, a-douez frazennoù all diwar un awen all : *mous oruen*

in hoguen. A c’haller treiñ “kaoc’h Orwen en ur bern”... Ne lârin seurt ebet war dalvoudegezh lennegel ar meneg, war dalvoudegezh ar meneg e-unan, avat, zo un toullad traoù da lâret. *In hoguen* a droer “en ur bern”. Ar ger modern *hogenn* a dalvez kement ha bern eta, met ivez un doare da bakañ e vlev (pe he blev). Un draig : an *-en-* en *Hogene* n’eo ket an *-enn* en *hogenn*. N’eus tamm diaester ebet o lakaat ar sterioù “bern” ha “tost” dindan ar memes tog : bezañ tost zo ivez bezañ berniet, dastumet... A-hed istor anvioù hon lec’hiou e kavfomp dimezioù stummet heñvel. Ar ger *mous* a sach hon evezh ivez ! Tregeriz a oar re vat petra eo an termen *mo(u)zogell*. Un termen nad eo ket gwall enorus en hon c’hevredigezh a-herie. Ha pan ouvezer e teu *mous* diwar ur wrizienn **mōd-* aet da **meud-* “glebor, saotradur” e weler mat penaos ar stêranv *Meu* (en reter Roazhon), hag a oa *Modonem fluvium* en buhez latin Mewen, zo savet war an hevelep gwrizienn. Moarvat da dreiñ “ar stêr hag a oar charreat stank” pe se. Hon (*H*)ogene a ziskouez ivez, evel *Are*, an dibenn *-e*. Dont a ra eus **ōkinēgi*.

Herve Bihan

Levrlennadur

Herve Bihan, À propos de l’oronyme *Arrée, Are*, *Études celtiques*, volume 46, 2020, CNRS Editions, pp. 81-86.

François de Beaulieu, *Dictionnaire des monts d’Arrée*, Skol Vreizh, 2025.